

AN ANAON

165

« Pedomp eta braz ha bihan,
« Koz, yaouank, tud a bep stad,
« Evit an Anaon en poan,
« Oh ! pedomp a galon vad ! »

Noz gouel an Holl-Zent ! Moueziou ar
[c'hleir

A zam ma spered a boan, a breder. .

Deut ez on aman en kreiz ar c'hoat bras

O sonjal pellat hag evit ankouas

An envor poanuis a wash ma c'halon

Gant tristidigez gouel an Anaon.

Karet am ije marteze tec'hel...

Ha c'hoaz nan ! — Pep tra a deu d'am
[gervel

Ha da laret d'in : — « O kemer true,

Lavar eur beden evit hon ine ! »

An noz a zo splan, an oabl digoumoul,

Ar reo-gwen a goue war ar bed sioul ;

Ouz lein an Nenvou, steredennet kaer,

Al loar o sevel a strink he sklerder,

Deliou ar c'hoajou n'int ket choaz kouezet,

Mes an darnvuian a zo alaouret,

Ha na c'hortozont nemed eun ezen

D'o distaga ouz ar skour da viken...

O kaeran taolen evit eun hunvre

Mur na vije kaon... — Peuc'h, en han Doue

Dre ar vro tro dro, eus an holl douriou

Ar c'hleier a deul o c'hlemmadennou,

Hag eus an draouien da lein ar mene,

N'eus nemed eur galv : kemerit true !...

Ar c'hlaz hirvoudus a garg an douar

Gant eur voubouen zo leun a c'hlac'har...

Kerken !, o burzud ! gant ar c'hlaz galvet,

Dre-holl, en dro d'in, bue zo savet :

Ar c'hoat a zihun dimeus e sioulder,

Hag an ezennig a c'houe gwall-dener,

An deliou melen a grog da drouzal,

A goue d'an douar... Na gredan finval...

Holl a us d'am fenn o deus tarnijet,

En dro d'am botou ez int 'n em vodet ;

Setu me nec'het ; trouz peb delien sec'h

A zeblant mouezig eun ine en bec'h !

Ha me, hep gouzout, a chom war o hent,

Koulskoude henoz, evel diagent,

E kustumont c'hoaz dont d'an tiegez
Elec'h tremenchont o zam buegez...

An nosvez-man eo Noz-an-Anaon,

Henoz e klaskont peden hon c'halon ;

— O, ma mignoned, na varc'hatet ket

Eur bedennig d'an Anaon karet !

Breman eo o zro ; arc'hoaz hon hini ;

An amzer a deu, an Ankou zo kri...

Dre-ze pa glevan trouz deliou ar c'hoat,

Hag an avel flour skanv o c'houibanal,

Pa glevan ac'han kân trist eur gaouen

O sevel du-hont eus eur goz derven,

Pa welan a-dreuz da vannou al loar

O nijal didrouz skeudennou liou-koar.

E laran dustu : — Setu ineou

O redek ar vro, o klask pedennou...

Darn ane a ouel, darn-all a hirvoud,

Ha war ma c'halon o deus holl galloud ;

Ha gant kalz a fe 'laran eur beden,

Eur beden, evit « ar re n'emaint ken ! »

Int o deus pleustret al lec'h a bleustran,

Int o deus karet an traou a garan ;

Da ouel an Holl Zent o deus aliez

Sonjet en poaniou an ineou kez...

A greiz holl warne eo dent ar Maro,

Ar Varnedigez a zo bet garo ;

Evelte ive — hepdale, marvad, —

Ma ine a vo en hevelep stad ;

Evelte e teü da c'houlén zikour,

Da glask aluzen eur werennad dour...

Neuze, ma Doue, piou sonjo ennon ?

Piou dre ar vro-man a bedo 'vidon ?

Dacust hag eur mignon, eur mignon

[hepken,

A glevo er c'hoat klemmou ma zelen ?

... Me a gred... An Anaon anaoudek,

N'ankouaont ket eur Leden galonek !

AR YEODET-BOCHER.

Tennet diwar *Bleaniou Yaouankiz*

pp. 123-125.